

DALC'HOMP D'HOR FEIZ!

DISKAN

*Da Feiz hon tadou koz, ni Paotred Breiz-Izel,
 Ni 'zalc'ho mat ato ;
 'Vit Feiz hon tadou koz hag en-dro d'he banniel
 Ni holl en em stardo.
 Feiz karet hon tadou, morse ni n'ho nac'ho,
 Kentoc'h ni a varvo ! (3 gwech)*

*D'ar c'hrouadur bihan, e kichenik e gavell,
 E lakit eur vamm vat, en deiz evel en noz ;
 Er boan hag en anken, buan hi a daol eur zell
 War groaz santel Jezuz... he zonj er baradoz.*

*D'ar paôtr, d'ar plac'h yaouank, c'houi 'ziskouezhent
 [ar furnez ;
 C'houi 'lavar : « It gantan, hep krena dirak den.
 Yaouankiz Breiz-Izel, bezit, epad ho puhez,
 Ato gwir gristenien, ha treitourien biken. »*

*D'an den koz gwen e benn, e korn an tan azezet,
 O sküllh daelou a geuz war e amzer genta,
 C'houi 'lar : « Bezit dinec'h, er baradoz 'vo kavet
 Eürusted peurbadus goude poan ar bed-ma. »*

*D'an den diwar ar mèz, kerkouls ha d'an den a vor,
 C'houi a ro nerz-kalon da stourm er boan ato.
 Gouzout a reont en nenv e kavint holl dor zigor ;
 Ar vuhez 'vo bet tenn ; d'an drubuilh kenavo !!*

IMPRIMATUR :

Kemper, 27 Gouere 1935

P. JONCOUR, vikel vrás

KANTIK SANT MELAR

DISKAN

*Kanomp, kanomp a greiz kalon
 Kantik Sant Melar hor patron :
 'Vit ar barrez eo eun dudi
 Dont da embann e veuleudi.*

*Gant Sant Millio hag e bried
 E doujans Doue oe savet ;
 Kerkent ha seiz vloaz ar bugel
 A oa karet dre Vreiz-Izel.*

*Ar prins Rivod, breur digalon,
 A laz Millio 'vit kaout e dron ;
 Met kaer 'n eus beza ar c'hrenva,
 E niz a ra d'ezan krena.*

*Ken na zav e penn an den kriz
 Dre eun torfed diskar e niz :
 Ne skoer ket 'vit e laza,
 Eur poezon en do da lonka.*

*Melarig a zo diwallet
 Dre nerz sin ar groaz venniget.
 Prins dre zindan, eneb Doue
 Dic'halloud krenn eo eur roue !*

*Koulskoude tan ar warizi,
 'Lak kalon Rivod da viri,
 Hag e klask adarre lemmel
 E vuez digant ar bugel.*

*Met digantan e vourrevien
 A zilamm daou ezel hepken
 En envor d'ar prins mat Millio
 A oa ken karet dre ar vro.*

*Mont war varc'h Melar n'hello ket
 E penn arme ar Vretoned,
 Hage e zorn morse ne zougo
 Gwalenn-roue e dad Millio.*



Setu petra 'zonj ar muntrer,
Mac'hagnet gantan ar merzer.
Dre vurzud avat Doue 'ro
D'ar Zant e zaou ezel en dro.

Ar Bourreo kriz, p'en deus gouezet
An eil burzud 'zo c'hoarvezet,
A dou (tra spontus da glevet)
'Renk e niz beza dibennet..

An taol 'vo grêt evit arc'hant
Gand an didruez Kioltan
A heuill ar bugel kalonek
Betek kouent Landevenneg.

E kreiz an noz eus ar gouent
Mesar 'ya adarre en hent
Ha dre Geraez e tremen
'N eur dec'het warzu Koadeuen.

Penaos e tigorit ho tor.
D'an drubarded, o kont Komor,
D'an drubarded a zeu hep mar
Da glask buez ho niz Mesar ?

Diwallit na ve touellet
Ar bugel dre gomzou flouret
Gant tud digalon ha divez.
Ne glaskont 'met kaout e vuez !

Ar prins yaouank, eün ha leal,
O c'hred re yuan didamall,
Ha d'o heul a ya da repoz
'Vit dihuna er baradoz.

'Velse d'an oad a bemzek vloaz,
Dibennet Mesar a varvas,
Mervel 'reas hep difennour
Dindan taoliou daou goz treitour.

O welet eur maro ken kriz,
Lanneuriz ha Lokmeleriz,
Penaos ne dommfe hor c'halon
A garantez 'vit hor Patron ?

Kioltan hag e vab Justin
A dec'h affo 'raog ar mintin,
'Vit kaout ar priz eo bet gwerzet
Gwad ar Merzer o deus lazet.

Doue avat a sko d'e dro :
Justin er porz a gouez maro ;
Kioltan buan 'zo tec'hет
Sonj kaout e vad eus e dorfed.

Siouaz ! ne dec'her pell morse
Araok brec'h galloudus Doue.
Kioltan a goll ar gweled
Ha dirak Doue 'zo galvet.

Rivod e-unan hep dale
A rento kont eus e vuhe :
Tri dreiz goude e genseurted
Gant dorn Doue ez eo skoet.

Sant Mesar, eus barr an nenvou,
Choui 'glev breman hor pedennou :
Selaouit 'ta ouz hor goulenn,
Hon diwallit a bep terzienn !

Dreist-holl terzien ar gwall dechou
A goll kement a eneou :
Lorc'h, pizder, luksur, gwarizi,
Mezventi, kounnar, diegi.

Karget oc'h ouzomp, Sant Patron,
Kreskit bepred hon nerz-kalon,
Ma valeimp war ho roudou
Gand an hent a gas d'an nenvou.

Ni 'vev en eun amzer diroll,
Buan awalc'h 'yafemp da goll :
Pedit evidomp, Sant Mesar,
Epad ma vimp war an douar.

Ha pa vimp êt d'ar baradoz,
Da ziskuiza 'touez hon tud koz,
Ni a gano gant levenez
D'eoc'h ha da Zoue trugarez !

IMPRIMATUR :
Corisopiti, 31 Augusti 1907
A. GADON, v. g.